

YF_0003_Ar Hemener

Pa teue ar hemener d'am zi da labourad
'Benn ma teue vije kreisteiz dezan e vije mintin mad

Dond a reas gand ar porz ya zur 'n e berr bajou
E zac'h gantañ war e choug o testum e nadoziou

En eur antreal e-barz an ti : «Bonjour» ma 'n-deus laret
Hag an dud e-barz an ti-mañ toud emaint en o yehed ?

O ya sur med an hini koz, yah om braz ha bihan
Deus d'an neh 'ta kemener, deus da gichen an tan

Deus d'an neh 'ta kemener, deus da gichen an tan
Da hortoz da zujuniñ da dommañ da zaouarn bihan

Pa oa debret dujuni komanset da labourad
Hag en da gontañ d'ar wreg dimeuz an tier mad

An deiz all bet e oan bet o wriad e-barz eur ger
Ene e oa eur wreg yaouank a ouie mad he micher

Me am-boa bet digand honnez eun trohad mad a gig sall
Eur bolotenn amann dous ha ma deiziou a-hend-all.

Gortoz 'ta ma hemener me roio deoh eur present
Domaig pa n'hen drapo, sur a-walc'h c'hwi vo kontant

Hi a dap sac'h ar hemener da gas ganti a-dreñv ar c'hleun
Me a zo vond d'ober eun dra me am-bo keun

O me a zo vond da gaoc'had e-barzh sac'h ar hemener
Domaig pa n'hen drapo ne bado ket gand ar fler

Pa oa graet ar gaoc'hadenn oa deuet en-dro d'ar ger
Ha en-doa roet e zac'h en-dro evid moned d'ar ger

Ha d'ar ger pa erruas, e wreg a lavar dezañ
"Ponner ho sac'h kemener, sur az-peus bet eur present

Ya sur az-peus bet eur present eo sur eun anduilhenn
Dispak anezi diouzhtu amañ, vo lakaet er soubenn

Pa oa bountet er soubenn, krog an dour da virviñ
Ne bade den ebet ken gant c'hwez fler e-barz an ti!